



C’hwi a gano : c’hwi a sello !

Skoaziad : 10 000 €

Ur c’houzad eus ar webstirad C’hwi a gano zo bet produet c’hoazh gant izili ar gevredigezh CPTMKK. Fent, sonerezh ha darempredoù (plaen pe get) etre oadourien yaouank zo e kalon an abadenn. Julie Morvan, unan eus pennoù skipailh C’hwi a gano, a gont hiroc’h...

Adalek an deroù oc’h bet e soñj kinnig koulzadoù all da-heul an hini kentañ ?

Skrivet hon eus senario ar c’houzad kentañ hep gouzout ha reoù all a vefe da heul. Ar c’houzad kentañ zo bet ur sapre “challenge” evidomp : ne oa tamm skiant-prenet ebet ganin na gant Perynn [Bleunven]. Met dalc’het hon eus gant ar c’hoant da gas da benn an heuliad betek ma vefe skignet. P’hon eus echuet gant ar c’houzad kentañ, edomp-ni hag ar strollad a-bezh entanet da genderc’hel gant C’hwi a gano. An energiezh-se he deus lakaet ac’hanomp da skrivañ un eil koulzad. Ni zo e penn an traoù, stag omp ouzh ar frankiz hon eus, n’hor bez redi ebet da echuiñ gant ur c’houzad da vare pe vare. Kinniget e vez un heuliad nevez hervez ar c’hoantoù, an amzer hag ar youl evit adkregiñ e-barzh.

Penaos oc’h deuet a-benn da arc’hantañ ar c’houzad kentañ ? Peseurt cheñchamant a zegaso ar Redadeg ?

C’hwi a gano n’en doa budjed ebet p’hon eus kroget en afer. E-lec’h klask arc’hant hon eus kavet gwelloc’h mirout hor startijenn war an dachenn da vat. Graet hon eus gant ar pezh a oa tro-dro deomp, youl vat hor mignoned, hor familh, tud hor rouedad. Prestet ’z eus bet dafar, savadurioù ha tiez deomp gant un toullad tud. Rastellet ’z eus bet un tamm arc’hant memes tra gant tud emellet er raktres. A-benn ar fin ez eus bet dispignet un 3000€ bennak en holl ha gounezet kemend-all evit ar c’houzad kentañ.

Dipitet omp bet gant kalite ar skeudenniñ o sellet ouzh an heuliad. Choazet hon eus mont war-raok e-keñver an dra-se. Goulennet hon eus arc’hant gant Ar Redadeg hag asantet eo bet da reiñ 10000€ deomp, ar pezh zo ur sapre sammad ! Met ker-ruz eo dafar ar c’hleweled, klask a raimp prenañ hag amprestañ peadra da wellaat ar skeudenn hag ar son, enrollañ ar c’hanaouennoù en un doare propoc’h ivez. An dud a labour evit C’hwi a Gano a chom a-youl-vat memes tra, ha ni ivez.

Ur pal pennañ d’ar raktres eo broudañ ar c’henlabour. Ent pleustrek, penaos ez a en-dro ?

E gwirionez n’eus nemet ur pal pennañ evit C’hwi a gano : kaout plijadur ! Ar c’henlabour zo muioc’h un doare d’ober eget ur pal. Boas omp d’an doare-se da labourat evit sevel traoù gant hor strollad mignoned. C’hwi a gano zo ur raktres ramzel ha ne c’hell ket bezañ sevenet hep sikour ur strollad a dud a-dreñv da souten ac’hanomp, da soñjal er raktres, da sammañ kiriegezhioù. Dre ma vez an holl o labourat a-youl-vat hag hep kaout dre ret skiant-prenet war ar c’hleweled pe ar filmañ, ez eo ispisial a-walc’h an doare mont-en-dro. Klask a reomp labourat gant tud a zo mennet da labourat war un dachenn bennak, hervez barregezhioù pep hini. Lakaet e vez tud e penn komisionoù (kinklañ, aveiñ, sonerezh, gouloù, making-of...), ar re-se o devez intrudu ha kemer a reont divizoù o terc’hel kont eus ar senario, ar budjed, an dafar... Emren eo ar strollad e-pad ar filmañ.

Mareoù disheñvel a vez er raktres (skrivañ, prientiñ ar filmañ, enrollañ ar c’hanaouennoù, ar filmañ da vat, prientiñ ar “première”...). Ne vez ket ar memes ezhommoù tud evit pep mare, pa skrivomp e vezomp hon-unan, Perynn ha me, met evit seveniñ e labouromp gant va breur Quentin. E-pad ar filmañ e c’hellomp bezañ 30 o tebriñ koan asambles diouzh noz !

Er c’houzad kentañ eo kalon an istor e vefe Lili en he bleud e-touez mignoned. Ha savet eo istor an eil koulzad endeo ?

Ya, krog eo ar prantad skrivañ abaoe ur pennadig. Ne c’hellan ket diskuliañ an istor c’hoazh, chom a raio kuzh betek ma vo skignet ! Lili a chomo tudenn bennañ an heuliad met graet e vo anaoudegezh gant tudennoù nevez, reoù all a yay kuit... Laouen e vefemp da signañ ar c’houzad e penn kentañ 2019. Labour zo !

Respontoù dastumet gant A.A.



Radio Naoned : brezhoneg war gwagennoù ar Gevred

Skoaziad : 15 000 €

Asantet eo bet gant ar CSA da raktres Radio Kerne : sevel ur chadenn radio vrezhonek e reter ar vro, e Bro-Naoned zokenoc’h ! Pennad-kaoz gant Morgane Bramoullé, kenrenerez Radio Kerne.

Peseurt palioù bras zo d’ar raktres-se ?

Krouiñ ur media hollvrezhonek e Bro-Naoned zo un arouez politikel kreñv. Ar pal ’vo hini an holl radioioù kevredigezhel ha lec’hel, da lâret eo reiñ mouezh d’ar re na vezont ket klevet a-walc’h, reiñ kont eus buhez ar gevredigezh tro-dro. Ha penaos ober an dra a bouez-se evit ar re a vev, a zesk, a stourm e brezhoneg ma n’eo ket dre ur media brezhonek penn-da-benn ?

Ha diaes eo difenn an teuliad e-keñver ar re a zo e karg eus an aotren Stad pe lec’hel ?

Meur a zezverk zo evit un teuliad ken luziet : yec’hed ekonomikel ar radio hag ar raktres, kempoellded ar gael programmoù, al linenn-stur hag al liammoù kreñv skoulmet el lec’h staliañ. Kreñv e oa teuliad Radio Kerne/Naoned met ret e oa deomp tremen hebiou ar skoilh politikel : staliañ ur radio e brezhoneg e departamant al Liger-Atlantel. Ha trec’h omp bet !

Ul labour meur eo sevel ur radio. Peseurt dregantad eus ar c’houst hollek a vo arc’hant gant ar Redadeg ?

Dek dregant eus ar budjed hollek ’vo arc’hantaouet gant ar Redadeg evit ar bloavezh kentañ.

Pell emañ Naoned eus Ploneiz. Penaos emac’h e-sell da genurzhiañ ar stummañ hag ar c’henlabour ?

Hor pal kentañ eo goprañ un den e Naoned evit na vefe ket renet ar radio a-bell. Gantañ pe ganti ’vo diorroet ar radio ha krouet kenlabourioù ha raktresoù abadennoù gant an dud a-youl vat. Alies ez aimp, Lou Millour, kenrenerez all ar radio, ha me, da Naoned evit labourat gant an den gopret eno a-benn gwriennañ ar radio e Naoned ha Sant-Ervlan.

Mont a rit da Naoned da zerc’hel emvodoù-kelaouiñ. Ur youl zo war an dachenn evit kas ar raktres da benn ?

Radio Kerne-Naoned ’vo radio Naonediz. Kalz tud zo deuet e darempred ganeomp pe en emvodoù foran hon eus dalc’het e Sant-Ervlan pe war-eeun ha dre bostel evit kinnig sikour teknikel, raktresoù abadennoù, ha traoù all c’hoazh. Ur gwir youl ez eus war an dachenn.

Penaos e c’hall Yann Naonedad skoazellañ ac’hanoc’h ?

Ezhomm ’vo sikour teknikel, kinnigoù war ar sonerezh, tud evit buhezañ an abadennoù, tud a anavez mat an dachenn, hag all. Forzh pe hini ’n deus c’hoant da gemer perzh en ur raktres hollek ha plijus e brezhoneg a c’hell dont !

Respontoù dastumet gant A.A.

Evit gouzout hiroc’h : www.radiokerne.bzh